

- 31 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

95. GARAND AR VRIZ

(follennoù 24-26)

Person Plouberr sur a voelle
en e gadeur sermon pa pigne

- Debonjour deoc'h ta Plouberis
ag eur c'halon trist en o hilliz

e tena d'ar billet e zoc'h bed
Gant Garan ar Vris e digoezet
A den truez outan nen deus ket.

Garan ar bris sur a voelle
An or var e vam pa zigore.

- Savit va mam, savit er mes
Ma rin eur voech c'hoas o goele ez.

- Pe te a zo skuiz deus va goelet
pe otramant skuiz gant va klenvet.

- Ne don skuiz na ganac'h na gant o klenvet
e tena dar billet e zoc'h^o bed ^{°kompren} : ez or
A ganen, va mam, e zeo digoezet. ez eur

Garan ar briz sur a voelle
Ar billet du dre ma tene

- Garan ar briz na voellit ket
eunan benag a renk monet.

- Me ne rachen fors evid tenan
panevid e va mam a zo klan.

A zo seiz mis zo var he goële
Na na neus den nemet ome.

Ne voa ket e hir peurlavaret
e kamarad en ti zo arruet :

- Asta fo, Garan, depecha
Ma zefomp da Lannion da loja.

Garan ar briz sur a voelle
an or var e vam dre ma serre.

- 32 -

- Mar de ta gorf te dar roue
me garfe va hene da Zoue.

Garan ar briz sur a voelle
En ti an otrou person pa errue :

- Otrou person, tallit va alc'hoechou
Kid da vellet va mam avichou.

Otrou sant Garan, va paeron,
Grid eur mirack benag evidon

pa vezo va mam en e fassion
likid kleïer Cavan da sonn

pa vezo en e fassion vras
likit kleïer Cavan da son glass.

E Kemper pa int arruet
Kleïer Cavan o deus klevet.

De gamarad en deus lavaret:
- Kleïer Cavan e meus klevet.

E kamarad en deus lavaret
de korporal : - Kleïer Cavan en deus klevet.

- Possubl e ve e ve gwir kement-se
A te penzek leo ahane !

- Lakit ho troad var ma hini
Ag e klefot ive koulz a me

E korporal en deus lavaret :
- Skrivid e gonje dan den man
Ma ai da vellet e vam zo klan.

Garan ar briz sur a voelle
En ti an otrou person pa errue :

- Otrou person, deud din va alc'hoecho
Ma zin da vellet va mam a zo maro.

- Possubl e ve gwir kement-se
a me neve deud a hane ?

Garan ar Vriz sur a woelle
An or var e vam pa zigore :

An or war e vam pan deus digoret
var leur an ti e voa lianet

- 33 -

Daou pok dezi en deus roet
e galon dre n'anter a zo ranet.

Ar verc'hez ag an itron santez Anna
A zo bet deus o liena.

Pelec'h e man ar c'har ag an ten^o ^o Kompren:
Da c'hass an daou gorf da San Jermen? an denn

vvvvvv

Jannton ar Charlès, 10 février 1851

vvvvvvvvvvvv